

Na veler qet gouez jardinou o touguen avalou poas.  
Va zad ha va mam voa ganet arozòn , a laværer,  
Ha pa laqent o boutou coad ne voa qet o boutou lèr.

Va greg ha me voemp demezet hon daou er memes devez;  
Pa ne zeus netra d'am geni n'en em gavàn qet dies.  
Va bugale a voe ganet o tonet var an douar;  
Na vez james teval an nòs pa sclèrijen caer al loar.

Pa ve goloet an amzer eo teval cazi atao;  
Pa ve sclêr an eol beniguet e cavàn an amzer vrao.  
Ur c'harad colo zo scànvoc'h eguet n'eo ur c'harad plom;  
Pa ra glao ne ra qet sec'hor, ha pa zeo yen n'eo qet tom.

Achuomp hor c'hanaouennic, rac peb tra e deus e fin;  
Eurus ma ell dont d'ho laqat un nebeudic da c'hoarzin.  
Ne garfen qet e ve cavet nep habec ebars enni,  
Rac ne zònjen e ne seurt drouc pa zoan ouz e c'homposi.

Ar zonic-mâ zo composet evit tremen an amzer,  
Ne meus-hi qet bet grêt rè hir dre ma e meus-hi grêt bêr.  
Mad pe fall e vezo cavet gant an hini e c'hano:  
An hini en deveus-hi grêt n'en deo qet Stris e hano.

FIN.



# CHANSON AL LEVITEN.

*Var un ton distinguet.*

**A**N trivac'h eus ar mis-mâ e meus occasion  
Da occupi va speret da gomposi ur son :  
Unan benac a c'hoerzo o clêvet anezi ;  
Deus eur c'hostez all m'em bo marteze sachiri.

Ar sujet eus va chanson eo an dallediguez  
A so erru guel gommun etoues ar merc'het qèz ;  
D'ar gloar ha d'ar vanite int so en em livret,  
Envel cracq demeselet e zint erru guisquet.

Dre ze-ta, potret yaouanq, pa heet da vale  
Evit guelet ho mestrez, m'o havertis a se,  
Da visqa eul Liviten pa héet d'o guelet,  
-Car potret o méstrennou na nint tam respetet.